




KENVREURIEZ AR BREZONEG

(35,36,37,38,39)

KAIEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG.

Taolenn an niverenn 39.

1) An Aotrou Person e-neus respontet.

2) Pedom evid an Anaon (kendalh)

a) Lennadennoù tennet euz an Aviel.

p.29 da 47

b) Interamanchou ar yugale.

p.48 da 55

3) Kantikou ha kanaouennoù brezoneg.

p.56

Evid kement-tra a zell ouz "Kenvreuriezh ar Brezoneg" (koum. 25 lur), her goulenn digand an:

Aotr. Job SEITE, Skol an Aod, 29249-GUISSENY

CCP. 1738-66 RENNES

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

1°) "Levr-Overenn"

gand eur golo-ler drevezet: 50 lur

gand eur golo-plastik: 36 lur

gand eur golo-paper kalet: 32 lur

2°) "Komz Doue en overenn"

Levr T: 30 lur

3°) "Komz Doue en overenn"

Levr A, B, C: pebhini 20 lur

4°) "Ar Briedelezh"

8 lur

5°) "An Nouenn"

8 lur

6°) "Cantiques Bretons du Diocèse de Quimper et de Léon. Livre d'accompagnement.

(5ème édition) 35 lur

7°) "Kroaziou Keltieg.

(Bleun Brug)

: 3 lur.

gand buzpenn ar mizou kas evid peb pakadenn.

Troidigezioù aotreet da arnod evid an eskobti a-berz an Ao. F. BARBU, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 1^a vir Genver 1976

Visant FAVE, eskob-Skoazeller.

TAOLIT-EVEZ:

Gand an niverenn-mañ eh-echu ho koumanant da "Kenvreuriezh ar Brezoneg". Bezit eta ar vadelez d'e renevezi evid ar rummad nevez (5 niverenn) a deñio er miz epad ar bloavezh 1976. (25 lur)

BENNOZ DOUE DEOH, EN ARAOG HA BLOAVEZH MAD.

J.Seité.Guissény
CCP Rennes 1738-66

D'am mignon Fanch,

Bezit dineh ha dizoursi, n'on ket bet feuket an disterra gand he lizer. En on amzer eo hardiseet an dud da lavared o zoñj d'ar re a zo e karg, kalz pe neubeud, hag ar re-mañ a gav alies avel a-benn. N'eo ket falloù moarvad. Tro vras a gaver da zisplega gwelloc'h ar perag hag ar penaoz euz ar pezh a blavarer pe a reer.

Kredit ahanon, lizeri all a resevan evid klemm euz meur a dra.

"Fur pe foll,
n'hell den plijoud d'an oll."

Hag e klevan lavared a beb seurt:

-Re, pe re nebeud a latin en ofisou. Re hir ar sarmoniou (ne glemm den gand ar re verr !). Ar hantikou nevez a vez cheñchet re alies, ne vez ket desket mad unan emaer dija o lansi unan all ! Re a-du gand ar re binvidig a lavar lod ha re a-du gand ar vicherourien a lavar lod all. Med ne echufen ket gand al litanioù, c'hwi oar gwelloc'h egedon petra'vez kontet. A drugare n'on ket kizidig na buan da bennfolli, klask a ran ober euz va gwella va labour a berson.

Ho lizer ? Buan awalh e vefen a-du ganeoh. Bremañ, hervez a ouzoh-pe n'ouzoh ket, eo kustumm beleien ar memez kanton da labourad "a-jeo", an deil o sikour egile da weled sklêr petra'zo da ober hag an oll goudeze o sachas asambles diouz ar memez tu e-leh ober pebhini euz e benn e-unan, hervez e faltazi. Pa vez eun nevezenti bennag da zigas e buez ar parrezioù, e vez greet eur vodadenn gand oll veleien ar hanton; awechou zoken e vez pedet unan pe unan euz an dud fidel da zond da lavared e zoñj war kudennoù a zo; ar hatekizoù, pask ar vugale, an ab-solvern roet da veur a hini war eun dro... ha kement 'zo. An traou ne deuont ket atao war eeun : lod euz ar veleien a blij dezo pismigad, o sachas war a-dreñv e-keid ha ma'z eus hini pe hini friantusoh hag a glask lammed dreist ar hleuzioù. N'eo ket warlerh ar mare eo mond da ormela emezo. N'eo ket êz en em gleved da vad, kredit ahanon.

Setu neuze am-ous lennet ho lizer da oll veleien ar hanton d'ar vodadenn ziweza. Nebeud a drouz da gomañs, med tamm ha tamm e tistagellas an teodou. Me a lavaras n'oa ket distrantell ho komzou na dizeven ho toare da zisplega ho soñj; dioustu e oan tamallet da veza a-du ganeoh.

Berr ha berr setu ar pezh a oe rebarbet din:

-N'emaom ket e-tro koulskoude da zond hanter kant vloaz war a-dreñv.

-Liderez e brezoneg n'eo nemed "Kolkloraj"

-An oll bremañ a oar galleg koulz ha brezoneg

-E brezoneg, n'heller ket displega sklêr ar gwirionezioù kristen.

-An dud n'emaint ket a-du gand ar brezoneg en ilizou.

-Hag ar yaouankizou neuze ? Hag ar re n'ouzont ket ar brezoneg ?

Ha me dezo: "War bouezig, war bouezig, paotred! n'emaom ket amañ evid divenn eur yez, ar galleg pe ar brezoneg; an dra-se a zo eur gont all."

Ne oa ket divizet netra, e hellit kredi; med evid echui e oa siouleet an avel.

Marteze e vefe mad deoh displega din petra'zoñjit euz ar vodadenn-se hag e vefe êsoh din en em zibaba ganto en dro a zeu.

Ho Person,
bepied an ho servij.

PEDOM. EVID AN ANAON. AN AVIEL.

1-MAZE 5/ 1-12a:

ALLELUIA, ALLELUIA.

Komz an Aotrou: Maze 25/34

Deuit, tud benniget gand va zad,
reseat an heritaj, ar rouantelez
a zo bet pourchaset evidoh azaleg krouidigez ar bed. Alleluia.

E peleh ema ar gwir eürusted ? Jezuz hen lavar deom:

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE:

- 1-En amzer-se, o weled pegement a dud a oa, Jezuz a zo pignet ouz tor ar menez;
mond a ra d'azeza, hag e ziskibien a dosta outañ.
- 2-Kregi a ra (pe: staga'ra) da gelnenn anezo, o lavared kement-mañ:
- 3- "Eürus ar re 'zo paour a galon, rag dezo eo rouantelez an neñvou.
- 4- "Eüruz ar re 'zo leun a zouster, rag an douar prometet a hounezint.
- 5- "Eüruz ar re o deus da ouela, rag frealzet e vezint.
- 6- "Eüruz ar re o deus naon ha sehed euz servij Doue,
rag o gwalh a vo roet dezo.
- 7- "Eüruz ar re 'zo trugarezuz, rag d'o zro e kavint trugarez.
- 8- "Eüruz ar re 'zo glan a galon, rag int a welo Doue.
- 9- "Eüruz ar re a labour evid ar peoh, rag anvet e vint bugale da Zoue.
- 10- "Eüruz ar re o deus da houzañv ablamour da zervij Doue
rag dezo eo rouantelez an neñvou.
- 11- "Eüruz oh-c'hwi pa daolo an dud dismegañs warnoh, pa raint brezel deoh,
pa lavarint e gaou beb seurt droug eneb deoh, ablamour din-me:
- 12- Bezit laouen ha tridit gand ar joa, rag digoll kaer ho peus da gaoud.

2- MAZE 11/ 25-30.

ALLELUIA, ALLELUIA.

Maze 11/25

Tad, mestr an neñv hag an douar,
Me ho meul da veza kuzet kement-mañ
ouz an dud fur ha speredeg
hag o roet da anaoud d'ar re vian. Alleluia.

"Deuit davedom, c'hwi hag a zo gwasket,

Dirag ar maro ez om ken dinerz ha ken dister, med
an Aviel a zigas da zoñj deom e-neus Doue muioh a garantez
c'hoaz evid ar re 'zo dinerz ha dister.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE.

25. Jezuz a lavaras: ^{ad}Tad; Mestr an Neñv hag an Douar, me ho meul da veza
kuzet
kement-mañ ouz an dud fur ha speredeg ha roet da anaoud d'ar re vian.
26. Ya, Tad, plijet eo bet deoh ober evelse.
27. Gand va Zad eo bet roet din kement a zo, ha ne anavez den ar Mab nemed
an Tad,
ha den an Tad nemed ar Mab, hag an hini a blij d'ar Mab rei dezañ da
anaoud.
28. Deuit davedon, c'hwi oll a zo skuiz hag a bleg dindan ho samm
ha me roio deoh diskuiz.
29. Kemerit warnoh va yeo, deuit d'ar skol ganin,
rag me 'zo dous hag izel a galon, ha c'hwi a gavo gras.
30. Va lezenn a zo êz da heulia, ha skañv ar zamm a roan da zougenn.

3- MAZE 25/ 1-13ALLELUIA, ALLELUI A. Filip 3/20

Ni a zo or bro en neñvou;
ahanone teuy an Aotrou Jezuz Krist,
ar Zalver emaom o hortoz. Alleluia.

Gouzoud gortoz en noz (Parabolenn an deg plah yaouank.)

Setu amañ, kontet deom, penaoz e tremene an traou gand eur fest-
eured e bro Jezuz. Ar plahed a enor a zo war al leh, ar re a zo war
hed hag ar re n'emañ ket. Evid ar hristen an dazorh a vo ar gouel
braz pa gejo ouz Doue? Bremañ dija en em breparom.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE.

1. Jezuz a gomze d'e ziskibien euz e zonedigez.
Lavared a reas ar barabolenn-mañ:
-Heñvel eo rouantelez an Neñvou
ouz deg plah yaouank,
pedet d'eur préd-eured, a gemeras o lampeier,
evid mond da ziambroug an ozah nevez.
2. Pemp anezo a oa diboell ha pemp a oa fur.
3. Ar pemp diboell o doa kemeret lampeier,
med heb kemeroud eoul.
4. Ar re fur a gemeras eoul e podou da heul o lampeier.
5. O veza ma talee an ozah nevez e teujont oll da voredi ha da gousked.
6. E-kreiz an noz e savas eun hopadenn:
-Setu an ozah nevez ! It er mêz d'e ziambroug !
7. Neuze e tihunas an oll blahed,
-hag e preparjont o lampeier.
8. Ar re ziboell a lavaras d'ar re fur:
-Roit deom euz ho eoul,
rag ol lampeier a zo war-nez mervel.

- 9-Ar re fur a respontas:
 -Ne vo ket awalh evidom hag evidoch-c'hwi,
 it kentoh da brena evidoh da di ar marhadour.
- 10-Med, endra m'edont o vond da brena,
 e tegouezas an ozah nevez.
 ar re a oa prest a yeas tre gantañ er zal-eured;
 hag e oe serret an nor.
- 11-Diwezatoh eh erruas ivez ar plahed diboell
 hag e lavarjont:
 -Aotrou, Aotrou, digorit deom !
- 12-Med en a respontas :
 -E gwirionez, me lavar deoh, n'hoh ana vezan ket.
- 13-Beillit eta, rag n'ouzoh nag an eur nag an deiz.

4- MAZE- 25/ 31-46

ALLELUIA.ALLELUIA

Komz an Aotrou:

Maze: 25/34

Deuit- tud benniget gand va zad,
 resevit en heritaj, ar Rouantelez
 a zo bet pourchaset evidoh azaleg krouidigez ar bed. Alleluia.

War ar garantez eo e vezim barnet.

Ar pezh a gont evid Doue eo ar garantez on-eus maget en or halon;
 ar garantez en on darempredou gand an nesa. War an dra-ze eo e
 vezim barnet.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE:

Jezuz a gomze d'e ziskibien euz e zonedigez,
 hag e lavare:

31. Pa zeuio Mab an den en e hloar,
 an oll êlez gantañ,
 eh azezo war e dron a hloar.
32. An oll boblou a vezo dastumet dirazañ.
 hag e tispartio an dud an eil diouz egile;
 evel ma tisparti ar pastor an dañvadezed diouz ar bouhed.
33. Hag e lakay an dañvadezed en tu deou dezañ,
 hag ar bouhed en tu kleiz.
34. Neuze e lavaro ar roue d'ar re a vo en tu deou:
 -Deuit, tud benniget gand va Zad,
 resevit en heritaj ar rouantelez a zo bet pourchaset evidoh,
 azaleg krouidigez ar bed.
35. Rag naon am-eus bet, hag ho-peus roet din da zibri;
 sehed am-eus bet, hag ho-peus roet din da eva,
 estrañjour e oan hag ho-peus roet din repu.
36. Noaz e oan hag ho-peus va gwisket,
 klañv e oan hag ez oh deuet d'am gwelet,
 er prizon edon, hag ez oh deuet beteg ennon.

37. Neuze e responto dezañ an dén just:
 Peur, on-eus ni ho kwelet o kaoud naon,
 hag on-eus ni roet deoh da zibri ?
 O kaoud sehed, hag on-eus ni roet deoh da eva ?
38. Pe vare on-eus ni ho kwelet estrañjour,
 hag on-eus ni roet deoh repu ?
 Noaz hag on-eus ni ho kwisket ?
39. Pe vare c'hoaz on-eus ni ho kwelet klañv pe er prizon ?
 hag ez om-ni eet davedoh ?
40. Hag e responto ar Roue:
 -E gwirionez, m'hen lavar deoh,
 bewech, m'ho-po greet kemend-all
 d'an distera euz va breudeur,
 d'in-me va-unan eo ho-peus henn greet.
41. Neuze e lavaro d'ar re a vo en tu kleiz:
 -It pell diouzin, tud milliget ahanoh,
 d'an tan a bado da viken,
 bet c'houezet evid an diacul hag e êlez,
42. rag naon am-eus bet ha n'ho-peus ket roet din da zibri,
 sehed am-eus bet, ha n'ho-peus ket roet din da eva,
43. Estrañjour e oan ha n'ho-peus ket roet din repu,
 noaz e oan ha n'ho-peus ket va gwisket,
 klañv hag er prizon, ha n'oh ket deuet d'am gwelet.
44. Neuze int-i a lavaro:
 -Aotrou, peur on-eus-ni ho kwelet naon deoh,
 pe zehed, estrañjour, pe noaz, klañv pe er prizon,
 ha n'om ket deuet war ho sikour ?
45. Hag e responto, en eur lavared:
 -E gwirionez, m'hen lavar deoh:
 bewech ma n'ho-peus ket greet kemend-all
 evid unan pe unan euz ar re zister-se,
 din va unan an hinin'ho-peus ket hen greet.
46. Hag ar re-ze a yelo d'ar boan a bado da viken,
 hag ar re just d'ar vuez ne vo fin ebed dezi.

5-MARK 10/28-30

ALLELUIA. ALLELUIA.

5Salm 118/88)

Grit din beva, Aotrou, dre hras ho karantez
 hag e virin ho komzou. Alleluia.

Penaos e vo digollet ar wir ziskibien:

Or mignon A...e-neus gouzañvet ha stourmet en eur vale war roudou
 Jezuz Krist hag en eur lakaad an Aviel en e vuez
 Med, na braz e vo e levenez p'en em gavo gand an hini a zo ar vammenn
 euz peb buez !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK:

28. Per, a zav e vouez da lavarad da Jezuz:

"Setu on-eus-ni kuiteet peb tra, hag om eet d'ho heul."

29. Ha Jezuz da respont: "E gwirionez, m'hen lavar deoh,
n'eus den ebed, kuiteet gantañ eun ti, breudeur, c'hoarezed,
tad, mamm, bugale, parkeier, ablamour din ha d'an Aviel,

30. ha n'e resevo ket, dija er vuez-mañ, kant gwech peadra da dalvoud
tiez, breudeur, c'hoarezed, mammoù, bugale ha parkeier,
gand heskinou (pe: gwallgasou) ouzpenn,
hag er bed da zond, ar vuez peurbaduz."

6-MARK 14/32-36.

ALLELUIA. ALLELUIA.

Yann 14/23

An neb am har a viro va homzou,
neuze, va zad e gâro, dond a raim ennañ
hag ennañ e raim on demeurants. Alleluia.

Da zerhent e varo, Jezuz a grog aon ennañ:

Da zerhent e varo, n'hell ket Jezuz kas an anken dioutañ med mond
a raio betek penn evid savetei ar bed.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK.

Jezuz a lavar d'e ziskibien: "Azezit amañ, epad ma vin o pedi."

33-Kas a ra gantañ Pêr, Jakez ha Yann,
hag e teu da goueza warnañ spont hag anken.

34. Lavared a ra dezo: "Trist da vervel eo va ene; chomit amañ, ha beillit."

35. Eet eun tammig pelloh, e kouez d'an douar; goulenn a ra en e bedenn
pellaad dioutañ an eur-se, ma hell beza pellêet.

36. Lavared a ra: "Abba ! Tad ! c'hwi a hell peb tra:
pellait diouzin ar halirad-mañ;
evelato, ra vo greet ho polontez-c'hwi, nann va hini."

7-MARK 15/ 33-34a-c, 37-39, 16/1-6:

ALLELUIA. ALLELUIA.

Dre an embann e-neus greet euz ar helou mad,
Doue or galv da gemer perz
e gloar on Aotrou Jezuz Krist. Alleluia.

Jezuz marvet a zo bremañ beo.

Na glaskom ket e-touez ar re varo an hini a zo beo. An dud o-deus anavezet Jezuz a zo bet enkrezet, evel dom, dirag ar maro. An testeni a roont deom a zikouro ahanom da drehi war an enkreiz.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK.

33. Deuet an eur a greisteiz, an deñvalijenn a gouez
hag a holo an douar a-bez beteg teir eur.
34. Da deir eur, Jezuz a daol eur griadenn gand eur vouez kreñv:
"Eloi, Eloi, lama sabaktani?"
da lavared eo: Va Doue, Va Doue, perag ho-peus va dilezet?"
37. Jezuz, goude beza taolet eur griadenn vraz, a zo tremenet.
38. Neuze ar ouel euz an templ a zo bet roget dre an hanter
euz an neh beteg an traon.
39. An ofiser, hag a oa a-dal da Jezuz, o welad penaoz e oa marvet,
a lavar: "E gwirionez, an den-mañ 'oa Mab da Zoue."
- 16/1. Tremenet ar zabad, Mari-Madalen,
Mari, Mamm da Jakez ha Salome,
a brenas louzeier-c'houez vad,
evid mond da valzami korv Jezuz.
2. Mintin mad, da zeiz kenta ar zizun,
ez eont d'ar bez, d'ar zav-heol,
3. Hag e lavarent kenetrezo:
-Piou a ruillo deom
ar mên diwar toull ar bez?"
4. Gand eur zell e welont ar mên ruillet a gostez,
braz koulskoude an tamm anezañ.
5. En eur vond tre er bez e welont,
azezet en tu dehou, eun den yaouank,
gwisket e gwenn, hag e oent spontet.
6. Med eñ a lavar dezo:
-n'it ket da sponta, Jezuz a Nazaret emaoñ o klask,
an hini a zo bet staget ouz ar groaz!
Adsavet eo da veo, n'ema ket amañ.
SEtu al leh m'oa bet laketa gorr.

8-LUKAZ 2/22b, 25-32:

ALLELUIA. ALLELUIA?

Hebr. 4/12

Leun a vuez eo komz Doue, leun a nerz; mond a ra beteg
e diabarz menozioù ha soñjou ar galon. Alleluia.

"Bremañ e hellit lezel ho servicher da vond e peoh."

An den koz Simeon, araog mervel, e-neus ar joa vraz da geja ouz
Jezuz. Mond a hell bremañ e peoh. Gwelet e-neus ar Zalver.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ:

22. Jezuz a zo douget gand e dud da Jezuzalem
evid beza kinniget d'an Aotrou.
25. Bez'e oa e Jeruzalem eun den anvet Simeon
den a vuez vad hag a zoujañs Doue;
gortoz a rae ar frealzidigez da zond da bobl Israel,
hag ar Spered Santel a oa gantañ.
26. Kelou e-noa bet digand ar Spered Santel ne welje ket ar maro
kent beza gwelet ar Mesiaz kaset gand an Aotrou.
27. Deuet eo d'an templ, poulzet gand ar Spered,
pa oa tad ha mamm ar mabig Jezuz o tigas anezañ
evid ober en e geñver kement a zo diouz giz al Lezem.
28. Kemer a ra ar hrouadur etre e zivreh, ha bennoz a lavar da Zoue
o lavared:
29. Bremañ, Va Mestr, e hellit lezel ho servicher da dremen e peoh,
hervez ho promesa;
30. rag gwelet o deus va daoulagad ho silvidigez,
31. an hini bet preparat gameoh da ziskouez d'an oll vroadou
32. sklerijenn war boblou ar bayaned da deurel sklêrder,
ha gloar evid Israël, ho pobl."

9. LUKAZ 7/11-17:

ALLELUIA. ALLELUIA.

Yann 11/25a

Me eo adsao da veo hag ar vuez
an neb e-neus feiz ennon ne varvo ket da viken. Alleluia.

Jezuz ha mab intañvez Naim

Jezuz a ziskouez e garantez pa wel ar vamm-ze o vond da heul korv he
mab d'ar vered. Na tost eo deom Jezuz, tost d'or poanioù !
Prest eo da rei deom ar gwir vuez.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ.

11. Jezuz a oa o vond d'eur gêr añvet Naim,
e ziskibien hag eur boblad tud a oa oh ober hent gantañ.
12. Digouezoud a reas tost da zor kêr
d'ar mare m'edod o kas eun den maro d'an douar
e vamm n'he-doa nemetañ hag intañvez e oa.
Kalz tud a oa ouz he heul.
13. O weled an intañvez, Jezuz a gemeras truez outi
hag a lavaras dezi:
"-N'it ket da ouela!".
14. Tostaad a reas hag e touchas ouz an arched
ar re a zouge ar horv a jomas a-zav
ha Jezuz a lavaras:
"-Den Yaouank, me'lavar dit: "Sav".
15. Neuze an den maro a zavas
a azezas war e hoañvez hag e komzas;
ha Jezuz a roas anezañ d'e vamm.
16. An oll a grogas aon enno
hag e veulent Doue en eur lavared:
"-Eur profed braz a zo deuet en on touez
ha Doue a zo deuet da weled e bobl."
17. Ar vrudagement-se a redas dre Judea a-bez
hag er brojou tro-war-dro.

10-LUKAZ 12/ 35-38,40:

ALLELUIA ALLELUIA

Filip 3/20

Ni avad a zo en neñv or gwir vro
ahano e hortozom da zond evel Salver
Jezuz Krist, on Aotrou. Alleluia.

Ober digemer d'an Aotrou pa zeu.

Evid an hini tremenet, dewet eo an eur d'en em gavoud gand Doue.
An eur-ze a zigouezo evidom-ni ivez; pedet om bremañ dija da
veza war hed.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ:

Jezuz a lavare d'e ziskibien:

35. Bezit atao prest, gand ho kouriz, endro d'ho kroazlez,
hag ho lampou war elum.
36. Bezit heñvel ouz tud o hortoz ar mare ma tistroio o mestr evid ar fest
evid digeri dezañ kerkent ha ma tigouezo, ha ma skoio.

37. Eüruz ar zervicherien-se a gavo o mestr anezo war veill pa zistroio.
 E gwirionez m'henn lavar dech,
 starda a raio e houriz,
 ober a raio dezo azeza ouz taol hag o zervicha an eil goude egile.
38. Ha ma teu d'an eilved beilladenn, pe d'an drede,
 ha m'o kav evelse, eüruz ar re-ze.
40. C'hwi ivez bezit prest, rag dond a ray mab an dñn d'an eur na zonjit ket.

11-LUKAZ 23/33-34, 39-46, 50, 52-53.

ALLELUIA, ALLELUIA

Diskuliadur 14/13

Eüruz bremañ dija ar re varo a varv en Aotrou,
 ya, emear Spered,
 ra ziskuizent euz o foaniou
 rag o oberou a ya d'o heul. Alleluia.

AL LARR MAD.

Vad a ra deom klevet an Aotrou Krist o lavared: "Hirio end-eeun e vezi ganin er baradoz."
 Ya, bezom fiziañs; Jezuz Krist a lavar deom beteg peleh ez a karantez Doue.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ:

- 33-Eur wech erruet el leh anvet ar Halvar
 e oe staget Jezuz ouz ar groaz, hag an dorfetourien ivez,
 unan en tu dehou, egile en tu kleiz.
34. Edo Jezuz o lavared:
 "Tad, pardonit dezo, rag ne ouzont ket petra emaint oh ober."
 Neuze e lodennont e zillad hag e tennont anezo d'ar zord.
39. Unan euz an dorfetourien lakete kroaz a wallgomze outañ:
 "Ha n'out-te ket ar Mesiaz ? En em zavete da-unan, ha ni ivez !."
40. Med an torfetour all a ree rebech dezañ:
 "N'az-peus ket doujañs ouz Doue zoken,
 ha te barnet d'ar memez kastiz ?"
41. Evidom-ni eo just, rag priz on oberou e resevom;
 med hemañ n'e-neus grêt droug ebed."
42. Hag e lavare:
 "Jezuz, ho-pet soñj ahanon, pa vezoh erruet en ho rouantelez."
43. Ha Jezuz dezañ:
 "E gwirionez, m'hen lavar dit
 hirio e vezi ganin er baradoz."
44. War-dro kreisteiz e oa, pa'z eus kouezet teñvalijenn
 war an douar a-bez, beteg teir eur,
 gand eur fallaenn war an heol.
45. Ha gouel an Templ a zo roget dre an hanter.

46. E Vouez savet uhel, Jezuz e-neus lavaret:
 "Tad, etre ho taouarn e lakan va ene."
 ha goude ar homzou-se, e-neus laosket e huanad diweza.
50. Ha setu o tond eun den anvet Jozef,
 unan euz ar Huzul-Meur, den mad ha just.
52. Eet eo da gaoud Pilat, da houlenñ korv Jezuz.
53. Hen disken a-ra euz ar groaz, hag e baka en eul liñsel,
 ha goueze e lak anezañ en eur bez kleuzet er roh,
 ha ne oa bet laket den ebed ennañ c'hoaz.

12-LUKAZ 24/ 13-35 (Krennet 24/ 13-16, 28-35.)

ALLELUIA ALLELUIA

Yann 3/16

Ker braz eo bet karantez Doue evid ar bed
 ma 'neus roet e Vab unganet.
 Kement den e-neus feiz ennañ
 e-neus ar vuez-peurbaduz. Alleluia.

DISKIBIEN Emmaüz.

Aliez e teu d'on dalla an dristidigez, an dizesper, ar boan.
 Piou a zeuio da ober deom beza treh ? Gand ar pennad-mañ euz an Aviel
 e welom ema aze Jezuz ganeomn, en or hichen war an hent.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ:

13. En deiz-se, an trede goude maro Jezuz,
 setu daou euz e ziskibien oh ober hent warzu eur gêriadenn;
 anvet Emmaouz, a zo war-dro div eur bale diouz Jeruzalem.
14. Ha kaoz a oa ganto euz an oll draou a oa bet c'hoarvezet.
15. E-kreiz o divisou, pa lavarent o zoñjou an eil d'egile,
 Jezuz e-unan a zo deut en o hichen hag a ree hent ganto.
16. Med o daoulagad ne oant ket evid e anaoud.
17. Eñ a lavar dezo: "Peseurd divizou ho-peus etrezoh en eur vale?"
 Com a reont a-zav, teñval o fenn.
18. Hag unan anezo, Kleopaz e ano, a respont dezañ:
 -N'eus nemedoh diavêzour e Jeruzalem o veza heb gouzoud
 an traou c'hoarvezet e kêr, en deiziou-mañ."
19. Goulenn a ra outo:
 -Peseurt traou ?
 Hag int da respont:
 -Diwarbenn Jezuz a Nazared:
 hennez a zo bet eur profed braz e halloud
 en e oberou hag en e gomzou, dirag Doue ha dirag ar bobl a-bez;
20. Med ar veleien vraz ha renerien or pobl
 o-deus roet anezañ d'ar gouarnour
 evid ma vije kondaonet d'ar maro ha staget ouz ar groaz.
21. Ni, koulskoude, on-noa esperañs e oa eñ o vond da zavetei Israeñ.
 Ha gand kement-se, ema bremañ an trede dervez,
 abaoe m'eo bet c'hoarvezet an traou.

22. Gwir eo ez eus merhed euz or re-ni hag o-deus lakeet ahanon nehet:
eet int, mintin mad, d'ar bez.
23. N'o-deus ket kavet e gorv, ha deut int en-dro;
lavared a reont zoken o-deus gwelet êlez
ha klevet ganto ema e buez.
24. Neuze, unan bennag euz or re-ni a zo eet beteg ar bez,
ha kavet o-deus peb tra evel ma lavare ar merhed,
nemed eñ, n'o-deus ket gwelet anezañ.
25. Lavared a ra Jezuz dezo:
-O tud berr a spered ha pell o kredi
kement o-deus lavaret ar brofeted !
Daoust ha ne ranke ket ar Mesiaz gouzañv ar poaniou-se,
evid antreal en e hloar ?
27. Neuze, o kemer Moizez da genta, ha goudeze an oll brofeted,
e tispleg dezo, en oll Skrituriou, ar pez a zo diwar e benn.
28. Dond a reont evelse da gichen ar geriadenn ma'z eent,
hag eñ a ra an neuz da gerzed pelioh.
29. Med int a bourchu warnañ, en eur lavared:
-Chomit ganeom, räg deut eo an abardaez,
hag an deiz a zo dija war e ziskar.
Hag ez a en ti evid chom ganto.
30. Ha setu, epad m'edo ouz taol ganto,
o veza kemeret bara, e-neus lavaret ar vennoz,
hag o veza e dorret, e-neus roet dezo.
31. Neuze e tigor o daoulagad hag eh anavezont Jezuz,
hag eñ a ya kuit diwar o gwel.
32. Hag e lavaront an eil d'egile:
-Ha n'eo ket gwir edo or halon o virvi ennom,
epad ma komze ouzom en hent ha ma tisplege deom ar Skrituriou ?
33. Sevel a reont raktal, ha distrei da Jeruzalem.
eno e kavont bodet an unneg abostol hag ar re'oa ganto,
34. Hag o hlevont o lavared: "Gwir mad eo (pe: Hab douetañs ebed-)
dazorhed eo an Aotrou,
han en em ziskouezet eo da Zimon.
35. Hag an daou ziskibl, d'o zro, a gont petra 'zo digouezet war an hent
ha penaoz o-deus e anavezet p'e-neus torret ar bara.

13- YANN 3/16-17

ALLELUIA. ALLELUIA

Salm 118/88

Dre ho kras, Aotrou, grit din beva,
hag e virin ar homzou deuet war ho muzellou. Alleluia.

DOUE E-neus karet kement ar bed.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

16. En amzer-se, Jezuz a lavar da Nikodem:
-Ker braz eo bet bet karantez Doue evid ar bed,
ma'neus roet e Vab unganet
evid ma vo kement den e-neus feiz ennañ diwallet da vond da goll,
pell ahano: evid ma'no buez peurbaduz.
17. Rag Doue e-neus digaset e Vab er bed,
n'eo ket evid barn ar bed,
med evid ^{me} vo salvet ar bed drezañ.

14-YANN 5/24-29:

ALLELUIA ALLELUIA

Maze 25/34

Komz an Aotrou Doue:

"Deuit, tud benniget gand va zad,
 resevit an heritaj, ar Rouantelez
 a zo bet pourchaset evidoh azaleg krouidigez ar bed."

Deuet eo an eur:

Deuet eo an eur da antreal er vuez, a lavar deom Sant Yann. Ar re
 a ro digemer mad da gomz Doue, ar re a ra ar mad, ar re-ze a dremenno
 euz ar maro d'ar vuez ha na vo fin ebed dezi.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

Jezuz a lavare d'ar Yuzevien:

24. Ya, e gwirionez, me lavar deoh:
 an hini a zelaou va homzou
 hag a gred en Hini e-neus kaset ahanon,
 hennez e-neus ar vuez peurbaduz,
 ha ne gouez ket dindan ar varnedigez;
 rag tremenet eo dija euz ar maro d'ar vuez.
25. Ya, e gwirionez, me a lavar deoh,
 dond a ra an eur, ha bremañ eo dija,
 ma klevo ar re varo mouez mab Doue
 hag ar re o-do klevet anezi a vevo.
26. Evel m'e-neus an Tad ar vuez ennañ e-unan,
 evel-se e-neus greet d'ar Mab kaoud ar vuez ennañ e-unan;
27. hag e-neus roet dezañ ar galloud da varn
 rag ma'z eo Mab-an-Den.
28. Na vezit ket souezet:
 dond a ra an eur
 ma tevio da gleved e vouez ar re oll a zo er beziou
 ha ma teuint er mêz.
29. Ar re o-devo greet ar mad
 oh adsevel evid ar vuez;
 ar re o-devo greet an droug
 oh adsevel evid beza barnet.

15-YANN 6/ 37-40:

ALLELUIA ALLELUIA

Yann 6/39

Setu amañ bolontez an hini e-neus kaset ahanon:
 ma ne gollfen nikun euz ar re e-neus roet din,
 med ma teufen d'o adsevel oll da vev d'an deiz diweza.

Jezuz a zo deuet evid m'on-defe buez.

Setu aze ar helou nevez, an hini n'eus nemetañ hag a hellfe rei deom
esperañs: Doue a zo tad. Doue a zo mad. Rei a ra deom e Vab, evid
ma nefem buez da viken.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

Jezuz a lavare d'an dud:

37. Kement hini a zo roet din gand va zad
a zeuio davedon,
hag an hini a zeu davedon
ne din ket d'e daoler er mêz.
38. Rag, n'on ket diskennet euz an neñv
evid ober va bolontez,
med evid ober bolontez an hini e-neus kaset ahanon.
39. Ha bolontez va zad e-neus kaset ahanon
eo ne gollfen nikun euz ar re e-neus roet din
med ma teufen d'o adsevel da veo, oll, d'an deiz diweza.
40. Rag setu bolontez va zad:
m'e-no ar vuez peurbadel
kement den a wel ar Mab hag a gred ennañ
ha me a zavo anezañ a varo da veo, d'an deiz diweza.

16-YANN 6/51 -58:

ALLELUIA ALLELUIA

Yann. 6/ 51-52

Me eo ar bara diskennet euz an neñv,
An neb a zebr euz ar bara-se a vevo da viken. Alleluia.

AR bara a vuez;

Bremañ dija e vevom euz Jezuz Krist, en eur gemer perz er bara m'eo
e gorr.
Da zeiz an dazorh e welim dremm Doue, en e splanndêr.

AVIEL JEZUZ LKRIST HERVEZ SANT YANN:

- Antronoz burzud ar bara kresket, e lavare Jezuz d'ar bobl:
51. "Me eo ar bara beo, a zo diskennet euz an neñv.
An neb a zebr euz ar bara-se a vevo da viken.
hag ar bara a roin, va horv eo, da rei buez d'ar bed."
52. Tabut a zav gand ar Yuzevien etrezo, hag e lavaront:
"Penaos e hell hemañ rei deom e gorr da zebri?"
53. Jezuz eta a lavar dezo: "E gwirionez, e gwirionez, m'hen lavar deoh,
"Ma ne zebrit ket korr Mab an Den, ha ma n'evit ket e wad,
n'ho peus ket ar vuez ennoh."
54. An neb a zebr va horv hag a ev va gwad, e-neus ar vuez peurbaduz,
ha me zavo anezañ da veo d'an deiz diweza.

- 55-Rag va horv a zo gwir vagadur, ha va gwad gwir evaj.
 56.An neb a zebr va horv hag a ev va gwad
 a jom ennon, ha me ennañ.
 57.Koulz ha m'e-neus va Zad, an hini beo, kaset ahanon,
 hag am eus buez dre va Zad,
 an neb a zebr ahanon, hennez ive e-no buez drezon.
 58.Setu pehini eo ar bara a zo diskennet euz an neñv;
 er hontrol d'ho tadou, o-deus bet ar mann da zebri hag a zo maro
 an neb a zebr ar bara-mañ a vevo da viken."

17-YANN 10/14-16:

ALLELUIA ALLELUIA

Yann 10/14

Me eo ar Pastor mad, anaoud a ran va deñved
 ha va deñved am anavez. Alleluia.

Jezuz ar pastor mad, a fell dezañ or ren d'ar vuez:

- 14.Me eo ar pastor mad, eme Jezuz : anaoud a ran va re,
 ha va re ivez am anavez,
 15.Evel ma anavez an Tad ahanon, ha me ivez a anavez an Tad;
 ha va buez a roan evid va deñved.
 16.Deñved all am-eus c'hoaz, ha n'emaint ket er park-deñved-mañ;
 ar re-ze ivez am-eus da zigas davedon: kleved a raint va mouez,
 ha ne vo nemed eur bagad deñved, hag eur pastor hebken.

18-YANN 11/ 17-25:

ALLELUIA ALLELUIA

Yann 11/ 25a-26:

Me eo an adsao da veo hag ar vuez;
 an neb e-neus feiz ennon ne varvo ket da viken. Alleluia.

Me eo an ad-sao da veo hag ar vuez:

O paouez mervel eme Lazar: beuzet eo an tiad tud en dristidigez....
 Penaoz a intent, nemed dre ar feiz, an diviz etre Marta ha Jezuz ?
 "Ea goude ma ve marvet, beva ray."

LENNADENN EUZ AN AVIEL HERVEZ SANT YANN:

17. Pa zigouez e Betani, Jezuz a gav Lazar dija er bez abaoe pevar devez.
 18. Bez'ema Betani tost da Jeruzalem, war-dro eun hanter eur bale.
 19. Setu ez eus deut kalz yuzevien da weled Marta ha Mari,
 d'ober dezo o gourhemennou a gant evid o breur.
 20. Marta, pa glev ema Jezuz o tond, a ya a-benn hent dezañ,
 epad ma chom Mari azezet en ti.
 21. Lavared a ra Marta da Jezuz:
 -Aotrou, ma vijeñ bet amañ,
 ne vije ket marvet va breur.
 22. Med bremañ c'hoaz, her gouzoud a ran,
 kement tra a houlennoh digand Doue, Doue henn raio deoh.
 23. Jezuz a lavar dezi:
 -Sevel a ray ho preur a varo da veo.
 24. Gouzoud a ran, a respont Marta, e savo da veo d'an deiz diweza,
 pa zavo da veo an oll dud varo.
 25. Jezuz a lavar dezi:
 -Me eo an adsao da veo hag ar Vuez;
 an neb e-neus feiz ennon, ha pa ve bet marvet, a vevo.

19. YANN 11/32b-45

(Krennet: 11/32b-36, 41-45)

ALLELUIA ALLELUIA

Yann 3/6

Ker braz eo karantez Doue evid ar bed
 ma'neus roet e Vab unganet.
 Kement den e-neus feiz ennañ
 e-neus ar vuez peurbaduz. Alleluia.

Gouela e-neus greet Jezuz d'e vignon Lazar/

Ne jom ket Jezuz dizeblant dirag ar maro. Gouela 'ra dirag bez e
 vignon Lazar.
 Med esperañs a ro deom n'eo ket echu toud gant ar maro; an hini a
 gred-, a vo ar vuez peurbaduz e lod.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

32. Mari a zigouez el leh m'eo chomet Jezuz, (deuet da Vetani)
 ha pa wel anezañ, e kouez e-harz e dreid hag e lavar dezañ:
 -Aotrou, ma vijeñ bet amañ, ne vije ket bet marvet va breur.
 33. Jezuz neuze, o weled anezi o ouela,
 hag ar Yuzevien deut d'e heul o ouela ivez,
 a zant ennañ skrij ha strafuill.
 34. Goulenn a ra:
 -E peleh ho-peus laketañ anezañ?
 -Aotrou, emezo, deuit ha gwelit.

35. Jezuz a zeu an dour en e zaoulagad.
 36. Ken ma lavar ar Yuzevien:
 "Gwelit 'ta pebez karantez e-noa evitañ."
 37. Med lod anezo a lavar:
 -Hemañ hag e-neus digoret e zaoulagad d'an hini dall,
 ha ne helle ket mired ouz an den-mañ da vervel?
 38. Jezuz, o skrija adarre a gerz beteg ar bez,
 a zo anezañ eur c'heo, gand eur mên d'e stanka.
 39. Lavared a ra Jezuz;
 -Tennit kuit ar mên!
 Ha Marta, c'hoar an hini maro, a lavar dezañ:
 -Aotrou, c'hwez a zo gantan, rag ar pevare devez eo dezañ.
 40. Respont a ra Jezuz dezi:
 -Ha n'am-eus ket lavaret deoh:
 -M'ho-peus feiz, e weloh gloar Doue?
 41. Setu e tenner ar mên kuit.
 Ha Jezuz
 e zaoulagad savet d'an neh, a lavar:
 -Tad, trugarez deoh da veza va selaouet.
 42. Me 'ouie, me, e selaouit ahanon atao,
 med ablamour d'ar bobled tud a zo amañ am-eus komzet,
 evid ma kredint ez eo c'hwi ho-peus va digaset.
 43. O veza komzet evelse, e lak oll nerz e vouez da grial:
 -Lazar, deuit er-mêz!
 44. Ha kerkent e teu an hini maro er-mêz,
 Lurennet e dreid hag e zaouarn,
 eul liñsel en-dro d'e benn.
 45. Jezuz a lavar dezo:
 -Distagit dezañ e lurennou,
 ha lezit anezañ da vond.

20-YANN 12/ 24-28

(Krennet: 12/ 24-26)

ALLELUIA, ALLELUIA

Disk. 14/13

Eüruz bremañ dija ar re varo a varv en Aotrou,
 Ya, eme ar Spered,
 Ra ziskreizint euz o foaniou
 rag o oberou a ya d'o heul. Alleluia.

Ar hreunenn a varv a zoug frouez.

Gand komzou êz da intent e lak Jezuz da ziwan en or halonou, an esperañs
 on-eus kement ezomm anezi.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

24. E gwirionez, m'henn lavar deoh, ar hreunenn winiz taolet en douar,
 ma ne varv ket, a zoug netra;
 ma varv, avad, e tougo frouez e-leiz.
 25. An neb en em gar, a 'n em gollo;
 an neb e-neus kâs outañ e-unan er bed-mañ,
 a'n em viro evid ar vuez peurbaduz.

26. An neb a zo servicher din, ra zeuio d'am heul
hag el leh ma vin-me, e vo va servicher ive;
kement-hini a vo servicher din, a vo roet enor dezañ gand va zad.
27. Ha bremañ, setu ez on strafuillet oll. Petra lavarin ?
Tad, saveteit ahanon euz an eur-mañ!
Ha koulskoude, evid kement-se eo ez on deuet betek an eur-mañ.
Tad, roit gloar d'hoh ano !
28. Dad a ra neuze eur vouez euz an neñv:
"Eag em eus roet gloar dezañ, ha c'hoaz e roin gloar."

21. YANN 14/ 1-6

ALLELUIA ALLELUIA

Yann 6/59

Setu amañ bolontez an hini e-neus kaset ahanon;
ma ne gollfen nikun euz ar re e-neus roet din,
ha ma teufen d'o adsevel oll da veo d'an deiz diweza. Alleluia.

DA DI an TAD ez om galvet da vond.

Eun tad a zastum e vugale endro dezañ, setu ar skeudenn a implij
Jezuz. En tu all d'ar maro ema Doue ouz or gortoz en e di, ha Jezuz
Krist a ziskouez deom an hent.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

- Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad, e lavar Jezuz d'e ziskibien:
1. Na laoskit ket ho kalon da veza trubuillet;
kredi a rit e Doue, kredit ennon-me ivez.
 2. E-barz ti va zad ez eus meur a zemeurañs;
ma ne vije ket bet evel-se, am-befe lavaret deoh:
rag mond a ran da gempenn deoh ho plas.
 3. Ha pa vin eet, ha p'am-bo kempennet deoh eur plas,
me a zeuio endro d'ho kemer fganin, evid ma vezoh c'hwi ivez
el leh m'emaon-me.
 4. D'al leh ma"z an c'hwi a oar an hent.
 5. Tomaz a lavar dezañ: "Aotrou, n'ouzom ket da beleh emaout o vond,
penaoz e ouezfem an hent ?
 6. Jezuz a lavar dezañ: " Me eo an hent, ar wirionez hag ar vuez,
n'ez a den d'an Tad, heb tremen drezon."

22-YANN 17/ 1-3, 24-26

(Krennet 17/ 24-26, pe 17/1-3,24)

ALLELUIA, ALLELUIA

Oberou 16/14b

Aotrou Doue, digorit deom or halon,
evid ma klasko gand karantez
komzou ho Mab.

Jezuz e-neus pedet evid e vignoned.

Jezuz a oar e tle mervel. Med gouzoud a ra ivez e vo trehet ar maro.
Hag e teuo peb den da anaoud ar garantez a zeu a-berz Doue.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

- 1-Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad, Jezuz, e zaoulagad savet warzu
an neñv, a bed evelhenn: "Tad, deuet eo an eur, roit gloar d'ho mab,
evid ma roio ho mab gloar deoh-c'hwi.
- 2.Hag evel m'ho-peus e roet dezañ galloud war beb den,
ma roio ar vuez peurbaduz da gement hini ho-peus roet dezañ.
- 3.Hogen ar vuez peurbaduz eo kement-mañ:
ma'h anavezint ahanoh, c'hwi ha n'eus Doue gwirion nemedoh
ha ma'h anavezint an hini ho-peus digaset: Jezuz Krist.
- 24.An neb na gar ket ahanon, ne vir ket va homzou.
Hogen, ar homzou a glevit n'eo ket va re-me int.
med re an hini on bet kaset gantañ, an Tad.
- 25.Kement-mañ 'zo bet lavaret ganin, epad m'emaon o chom en ho kichen.
- 26.Med bez'ho-po en ho kichen ar Spered Santel,
a vo kaset gand va Zad euz va'ferz:
hennez a roio deoh kelennadurez war beb tra
hag a zigaso soñj deoh euz kement am-eus lavaret deoh.

23.YANN . 19/17ab-18, 25-30

ALLELUIA ALLELUIA

Yann 11/25a-26

Me eo an adsao da veo hag ar vuez;
an neb e-neus feiz ennon ne varvo ket da viken. Alleluia.

N'eus ket brasch karantez eged rei ar vuez.

Amañ eo kontet deom maro Jezuz...Selaouom gand doujañs.
Jezuz e-neus karet ahanon beteg mervel evidom.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

- 17.Ar Juzevien a gemeras Jezuz.
Jezuz sammet euz e groaz a yeas er mêz euz kêr,
etrezeg eul leh añvet kalvar, ar glopenn, en Hebreeg: Gulgota.
- 18.Eno e oe staget ganto ouz ar groaz ha daou all gantañ, unan a beb tu.
ha Jezuz er hreiz.
- 25.En o zav, e kichen kroaz Jezuz edo e vamm, ha c'hoar e vamm, Mari,
gwreg Kleofaz, ha Mari-Madalen.

26. Jezuz o weled e vamm hag en he hichenn an diskibl a gare,
a lavar d'e vamm:
-Maouez, setu ho Mab."
27. Da houde e lavar d'an diskibl:
-setu ho mamm! "
- Hag azaleg neuze e kemeras an diskibl anezi en e di.
28. Goudeze, Jezuz o gouzoud e oa neuze kaset peb tra da benn, a lavar evid ma vefe digaset da wir ar Skritur:
-Sehed am eus !
29. Bez'e oa eno eur pod leun a winegr,
lakeet e oe e penn eur gorzenn hizop, eun tamm spoue,
karget a winegr, ha tosteet e oe ouz genou Jezuz.
30. Goude m'e-noa kemeret ar gwinegr, e lavaras Jezuz:
-Peurhreet eo peb tra !
Hag o veza soublet e benn, e rentas e spered.
-

INTERAMANCHOU' AR VUGALE.

Lennadennoù.

Kemeret a heller hini pe hini euz al lennadennoù meneget evid interamant an dud vraz. Amañ warlerh eun nebeud lennadennoù hag a zo muioh diouz doare interamant eur hrouadur.

1-JOB 14/1-3, 10-15

P'ema ar boan ouz or gwaska.

Job a zo eun den doujuz da Zoue. Koulskoude e kouez gwaleuriou warnañ ha war e dud. Ponner e kav samm ar vuez. Selaouom e glemmou hag unanom er mouez gantañ da bedi.

LENNADENN EUZ LEVR JOB:

1. An den, ganet gand ar vaouez,
a zo berr e vuez, karget avad a drubuilhou.
2. Evel eul vleunenn e tigor hag a oueñv
tehed a ra evel eur skeud, heb arsao.
3. Warnañ eo e troit ho sellou
hag eñ eo e halvit dirazoh d'e varn.
10. Dinerz e chom an den a varv
ha pa vez maro, petra deu da veza ?
11. An doureier er mor a hell steuzia
hag ar stêriou mond d'an hesk ha dizeha:
12. Evelse an den, eet en e gousk, mui ne zavo,
tremen a ray an neñvou araog ma tihuno.
ha me savo euz e gousk.
13. Ma teufeh c'hoaz d'am huzed e bro ar re varo
ha d'am diarbenn da hortoz ma ve torret ho kounnar
a hellfed divizoud ar mare ma teufeh da gaoud soñj ahanon.
14. An den, eur wech maro, ma hellfe adsevel da veo,
e-keid ha ma vefen o hedol, e talfen fiziañs,
beteg ma teufe evidon ar mare.
25. Va gelver a refeh ha me a respontje deoh,
c'hoant ho-pefe da gavoud endro labour ho taouarn.

2-FURNEZ 2/23 ; 3/1-6, 9

etre daouarn Doue ema buez peb den.

Pa zeu ar maro da skei, dreist-oll pa vez kont euz eur hrouadur, aliez n'ouzm ket petra da zoñjal....

Ar pennad amañ warlerh a zigor deom on daoulagad hag a ra deom gweled en tu all d'ar maro.

LENNADENN EUZ LEVR AR FURNEZ.

2/23 Doue e-neus krouet an den evid beva da viken,
greet e-neus anezañ eur skeudenn euz ar pezh m'eo e-unan.

3/1 Etre daouarn Doue ema buez an dud just,
gwaskerez ebed n'he-deus krog warno.

2.Evid an den diboell e seblantont beza marvet,
o maro , d'e zoñj, a zo bet eur gwaleur.

3.P'o-deus kuiteet ahanom e kreded e oant eet da netra
ha padal emaint e peoh.

4.Hervez kredenn an dud e oant bet kastizet
med dre o esperañs e oant dija divarvel.

5.Dister a dra eo ar pezh o-deus bet da houzañv
e-skoaz an eürusted heb par a voñ lod;
rag Doue e-neus o ampruet
hag o havet din anezañ.

6.Evel an aour paseet dre an tan,
e-neus o ampruet;
evel eur zakrifis parfed
e-neus o digemeret.

7.Ar re a laka o fiziañs en Aotrou
a intento ar wirionez;
ar re a zo fidel
a jomo gantañ en e garantez
rag d'ar re zibabet gantañ
e ro gras ha trugarez.

3-IZALAZ 25/ 6a, 7-9

DOUE a zo treh d'ar maro.

Pa vezom sammet gand ar boan, neuze eo deom kleved ar profed o lavared deom eo Doue treh d'ar maro. Dond a raio Doue da voda e oll vugale ha da rei dezo ar gwir eürusted.

LENNADENN EUZ AR PROFED IZAIAS.

6. En deiz-se, an Aotrou, mestr ar bed,-
a bourchaso evid an oll boblou war an menez-mañ,
7. War ar menez-mañ, e rogo ar ouel a hronne an oll boblou
hag ar pallenn o goloe.
8. Distruj a ray ar maro evid atao;
hag an Aotrou a zeho an daelou war an oll dremmou,
hag e tilamo kuit diwar ar bobl,
an dismegañs taolet warnañ dre ar bed a-bez,
rag Doue eo e-neus hen lavaret.
9. Hag e vo lavaret en deiz-se:
- "Setu on Doue:
ennañ edo ar fiziañs, or saveteet e-neus,
Doue, edo on esperañs ennañ,
Bezom el levenez, bezom laouen,
rag or zaveteet e-neus."

4-KLEMMGANOU 3/17-26

Pa vezan gwasket e troan warzu Doue.

Pa vez skoet eur hrouadur gand ar maro, pa vez an dizesper o klask kaoud
krog warnom, pa blegom dindan samm ar groaz...petra da lavaret, petra da
ober ? Troom neuze on daoulagad war-zu an Aotrou Doue. Ouz or zelaou ema.

Lennadenn euz levr ar Hlemmganou.

- 17 Soñj ebed ken na jom ganin euz an eürusted,
ha kuit dicuzin eo eet ar peoh!
18 Hag em-eus lavaret: va fiziañs a zo eet da netra
hag ivez an esperañs a zeue din a-berz an Aotrou.
19 Soñjal ha sañjal en dienez m'on kouezet
n'eo evidon nemed c'hwervoni hag empoezon.
20 Heb ehan e sav ar zoñj-se em ene
hag e welan va ene o tinerza.
21 Mad setu e tigas an din da soñj
er pezh a ra va esperañs.
22 Madeleziou Doue; chom a ra c'hoaz anezo,
hag e drugareziou na ehanont ket.
23 Beb mintin e teuont da renevezi,
rag fidel eo an Aotrou heb morse skuiza.
24 Ennon va-unan e lavaran: va lod eo an Aotrou,
setu perag em-eus fiziañs ennañ.
25 Mad eo an Aotrou evid neb a dro warzu ennañ,
evid an neb a zo war glask anezañ.
26 Eun dra vad eo gortoz e pech
sikour a-berz an Aotrou.

5-ROM 6/3-4, 8-9

Mab Da Zoue da viken.

Eur hrouadur badezet a zo mab da Zoue, evid atao. Merket evid an eternite, en tu all d'ar maro, eo e lod ar gwir vuez gand Doue. Setu aze esperañs an oll gristenien.

Lennadenn euz lizer Sant Paol d'ar Romaned.

3. Va breudeur, her gouzoud a rit, ni oll hag a zo bet badezet, er Hrist ez om bet badezet.
4. Sebeliet om bet a-unan gantañ, dre ar Vadiziant en e varo, evid ma teufem da ren ni ivez eur vuez nevez, evel ma'z eo adsavet da veo an Aotrou Krist, dre halloud skeduz an Tad.
8. Mad, ma'z om tremenet dre ar maro gand ar Hrist, e kredom e vevim ivez gantañ.
9. Rag, her gouzoud a reom: ar Hrist savet a varo da veo ne varv mui; ar maro warnañ n'e-neus mui a halloud.

6-ROM 14/ 7-9

Sellom ouz buez ha maro an Aotrou Krist.

Jezuz Krist n'e-noa ket meritet ar maro ha koulskoude eo bet kondaonet ha staget ouz ar groaz. Jezuz a zo aze, tost deom, dre e boaniou ha dre e varo. Enñ eo a ra deom intent petra eo ar vuez ha petra eo ar maro.

Lennadenn euz lizer Sant Paol d'Ar Romaned.

7. Va breudeur, ne vev, nikun ahanom, evitañ e-unan, ha nikun ne varv evitañ e-unan.
8. Rag ma vevom, e vevom evid an Aotrou, ma varvom e varvom evid an Aotrou. En or buez hag en or maro, ez om d'an Aotrou,
9. Rag, ar Hrist a zo marvet ha savet da veo, evid dond da veza mestr ar re varo hag ar re veo.

7- I Kor 15/ 20-23 An Aotrou Krist or... has d'e heul d'eur vuez nevez.

An Aotrou Krist, dre e varo hag e adsac da veo, e-neus digoret deom hent ar vuez.

Lennadenn euz lizer kenta Sant Paol da Gristenien Korint.

20. Va breudeur, Or Zalver a zo savet a-douez ar re varo,
an hini kenta euz an dud eet e kousk ar maro.

21. Evelse, koulz ha ma oa deuet ar maro dre eun dén,
dre eun dén ivez e teu an adsao da veo.

22. En Adam e varv an oll, en Aotrou Krist o-do an oll ar vuez en-dro.

23. Med peb-hini en e renk: An Aotrou Krist da genta penn.

8- EFES 1/3-5 Dibabet om bet gand Doue.

Doue e-neus on dibabet er Hrist, a-raog krouidigez ar bed evid beza sent.

Lennadenn euz lizer Sant Paol da Gristenien Efez.

3. Meulet ra vo Doue, Tad Jezuz Krist, on Aotrou !
Euz lein an neñv, e-neus karget ahanom
a beb seurt bennoziou speredel en Aotrou Krist.

4. Er Zalver-se e-noa choazet ahanom a-barz ma oa krouet ar bed,
evid beza santel ha dinamm dirazañ, er garantez.

5. Divizet e-noa a viskoaz ober ahanom e vugale,
dre Jezuz Krist hag evid beza unanet gantañ,
ha kement-se hervez m'eo bet plijet gand e vadelez.

9- I TESS. 4/13-14; 18A-drugarez d'an Aotrou Krist n'eo ket ar maro ar fin
a beb tra.

Pa zeu ar maro da skei eur hrouadur, n'ouzom ket petra da zoñjal.
Ar gristenien genta ivez a glaske gouzoud ar perag hag ar penaoz euz ar
maro. Sant Paol a ro dezo ar respont a-berz an Aotrou Krist.

Lennadenn euz lizer kenta Sant Paol da Gristenien Tesalonik.

13. Va breudeur, ne fell ket deom e chomfeh hab gouzoud ar wirionez,
diwarbenn ar re varo.

Ma vezit ket glaharet, evel ar re all,
ar re n'o-deus esperañs ebed.

14. Evid gwir, ma kredom eo maro Jezuz,
hag adsavet da veo,
kredom kenkoulz all
e lakay Doue da adveva gand e Vab,
ar re a zo maro e karantez Jezuz.

18. En em frealzit eta, an eil egile dre ar homzou-se.

10- I PER 1/3-8Eun esperañs virvidig a zeu deom a-berz Doue.

An Abostol Sant Pêr a ro da anaoud d'ar gristenien genta ar helou mad.
Gweled e-neus Jezuz Krist o vervel, test eo euz e adsao da veo. Kemerom
perz en e esperañs.

Lennadenn euz lizer kenta an Abostol Sant Per.

3. Meuleudi da Zoue, Tad Or Zalver Jezuz Krist,
e-neus bet ar vadelez vraz da rei deom eur vuez nevez,
dre Jezuz Krist savet a varo da veo,
ha roet deom eun esperañs virvidig.

4. Eun heritaj ha he hell ket breina, na beza saotret, na gweñvi,
eun heritaj miret evidoh en Neñvou,

5. C'hwi hag e-neus galloud Doue dalhet, dre ar feiz,
evid ar zilvidigez, eur zilvidigez a zoprest d'en em ziskouez,
pa vo fin d'an amzeriou.

6. Kement-se ho laka da dridal gand ar joa,
daoust ma'z eo red deoh c'hoaz
epad eur pennad amzer, kaoud da houzañv e meur a zoare.

7. Evelse, talvoudegez ho feiz, priziush eged an aour,
eun dra dibabuz, hag a vez amprouet dre an tan,
a vo kavet din a veuleudi, a hloar hag a enor,
pa zeuy ar mare da Jezuz Krist d'en em ziskouez.

8. Kared a rit anezañ heb beza e weled,
heb e weled c'hoaz bremañ, e kredit ennañ,
leun a feiz e tridit gand eur joa dreist-lavar ha leun a hloar.

11- YANN 4/7-10 Kemennadurez Sant Yann.

Selaouom ar pezh a lavar deom Sant Yann, an Abostol karet gand Jezuz.
Eet eo da heul Jezuz war hent ar Halvar ha beteg e-harz ar groaz.

Lennadenn euz lizer kenta an Abostol Sant Yann.

7. Va re muia karet, en em garom an eil egile,
peogwir eo ar garantez euz a Zoue,
ha kement-hini e-neus karantez a zo ganet euz a Zoue,
hag e-neus anaoudegez a Zoue.
8. An net n'e-neus ket karantez n'anavez ket Doue,
rag Doue a zo karantez.
9. Evelhenn eo deut karantez Doue da bara en on touez:
e Vab unganet e-neus Doue kaset er bed,
deom da gaoud vuez drezañ.
10. Amañ eo ema ar garantez: n'eo ket ni on-eus karet Doue,
med eñ an hini e-neus karet ahanom ha kaset e Vab
da veza roet e sakrifikis evid pardon ar pehejou.

12- DISK 7/9-10; 15-17 Boda a ra Doue e vugale...

Amañ eur weladenn e-neus bet Sant Yann, an abostol karet gand Jezuz.
Doue a zo mad, Doue a zo karantez, seha a ray an daelou euz on daoulagad,
or boda a ray en e garantez.

Lennadenn euz levr an Diskuliadur.

9. Gwelet am-eus eun engroez vraz a dud,
na helle den konta ped a oa anezo (pe: ped e oant)
euz kement bro, kement rumm, kement bobl ha kement yez a zo,
oll en o zav dirag tron Doue ha dirag an Oan,
dillad gwenn ganto, ha skourrou palmez en o daouarn;
10. Hag e savent uhel o mouez, da lavared:
"Ar zilvidigez a zo d'on Doue, azezet war an tron, ha d'an Oan ivez!"
15. Setu perag emaint dirag tron Doue,
ouz e zervicha deiz ha noz en e zantual,
hag an hini 'zo azezet war an tron a raio e zemeurañs ganto
16. N'o-devu mui naon na sehed,
ne vint mui skoet gand an heol na tommder ruz ebed;
17. rag an Oan, an hini 'zo e-kreiz an tron, a vo o fastor,
evid o ren daved feunteuniou dour ar vuez,
ha Doue a zeho an oll daelou euz o daoulagad."

13- DISK 21/1, 3-5a Eun deiz a zeuio hag e vezim oll unanet asamblez.

Amañ eur weladenn e-neus bet Sant Yann, An Abostol karet gand Jezuz.

Lennadenn euz levr an diskuliadur gand an Abostol Sant Yann.

1. En deiziou-se, me Yann, am eus gwelet eun neñv nevez
hag eun douar nevez,
rag an neñv kenta hag an douar kenta a oa eet ebiou(pe:da get)
hag ar mor n'eus mui anezañ.
3. Klevet am eus eur vouez kreñv o tond euz an tron, hag a lavare:
"Setu demeurañs Doue gand an dud, bez' e vo o chom ganto,
int a vo e bobl, ha Doue e-unan a vo ganto.
4. Seha a raio Doue an oll daelou euz o daoulagad,
hag ar maro ne vo mui anezañ;
ne vo mui na kañv, na klemm, na poan,
rag ar bed kenta a vo eet ebiou(pe: da get)
5. Hag an hini 'oa azezet war an tron e-neus lavaret:
"Setu amañ oh ober nevez peb tra."

KANTIKOU HA KANAOUENNOU BREZONEG.

1°) Strollad "Kanerien Sant VAZE", 30, rue Basse-29210 MORLAIX. tél.88.03.08

e-neus enrollet evidoh, ma keroh o goulenn....

- n° 2 30cm. Joa d'an Anaon:Toussaint.Liturgie des Défunts.
- N° 4 25cm. Bleuniou Breiz.Chansons bretonnes
- N° 6 17 cm.Bro goz ma Zadou..
- N° 9 25cm. Noël en Bretagne: 10 Noëls bretons.
- N°19 17cm. Festival des Cornemuses- 4 choeurs.
- N°21 30cm.Itron Varia Cantiques Pardons.
- N°25 30cm Festival du Relecq N°2
- N°28 30cm Passion-Pâques en Bretagne
- N°29 30cm Festival du Relecq N°3
- N°30 30cm Chants du Vieux Monde
- N°31 30cm Bombarde, orgue et bassons.
- N°33 30cm Mor a gan.
- N°34 17cm Bombarde et orgue...pour danser
- N°35 30cm Nedeleg e Keltia
- N°36 30cm Messe de Ste Anne du Relecq.

-Ouzpenn ar pladennoù-se , e kavoh ivez e Montroulez (Kanerien Sant Vaze)
10 lev , dastumet enno ar braz euz ar haerra kantikou ha kanaouennou
brezoneg anavezet, gand an toniou hag o eiladurioù.

2°) "Kanerien Dom-Mikael" Bourg de Plouguerneau 29232
o deus enrollet.....

- N°1 Da feiz on Tadou Koz.
- N°2 Sao Breiz-Izel.
- N°3 Concert Spirituel: a)Kantikou brezoneg
b)kantikou kembraeg.

3°) Visant SEITE, Ti-Carré, 29150 Chateaulin .Tél.86.01.42

e-neus embannet nevez-zo, daou lev nevez evid
deski brezoneg "Ar brezoneg dre ar radic".

Le breton par les ondes-- tome 1=17,50 f .Tome2:19,50 f
+ 2,20 f pour frais d'envoi.

O goulenn digantañ war eeün.